

Berthou Erwan
(Alc'houeder Treger) Pleuvihan (1861) – Pleuvihan(1933)

Avalou-stoup, bet embannet e 1914.
Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez
gand ereadurez ar galleg.
Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Taolenn

Skeudennou
Ar grak-kazeg hag ar rozenn
Etre an daou laer
Ar falz Breizad
Ar staoter
Gwalenn ar goz tostenn

Skeudennou

(gand klotennou a-ziabarz)

I

Kaledvoulc'h

Kaledvouc'h, eun den krenn gand barv gwenn ha bleo du,
Prest dalhmad da voulha, da droha tu pe du,
Hast en-devez bep bloaz da grapa war ar mên,
Gantañ eur hleze braz n'en-deus biskoaz lazet den.
Felloud 'ra d'ar paour koz war ar roz digouina :
« Peoh a zo, tud diroll ? » Hag an oll a lar : « Ya ! »
1912

II

Strobinell

E pep kendalh pa vez ar banvez arru tomm,
E weler Strobinell o sevel en e blomm.
Sell kleiz, sell dehou, abof¹, lak e gov war an daol :
« Mignoned, ra vezo !... ra chomo !... Karet² oll
Koz ti ha koz vragou, koz votou. Ra vezo !
Ha daelou ar pikouz ruill hep trouz er friko.
1912

III

Teenn aour

Daoulagad 'mêz e benn, eur varvenn velen hir.
Eur vouez kleuz 'vel eur horn, en e zorn laonenn dir,
Hdemañ 'lah kristenien, beleien a-vagad
Hag ar hoz drouized, gand sehed 'ev o gwad.
Gand Ar Fur ha Kornou 'ra stripou ha kig sall.
En e gastell Kever, euz ar ber, 'zo c'hweh Gall.
1912

IV

Tangwall

Eun den a oar c'hwesa e nesa, rag e fri
Mar n'en-deus daou droatad, o ya vad ! en-deus tri.

¹ abof : ? "abaf"

² Karet : Karit.

Eur garel³-vraz, eur raz, ne douj kas, eur furcher ;
E blijadur levrou, dornskridou, koz paper.
'N-eus diou vro : Breiz-Izel, e gavell, ha Keumri.
A zo 'barz, telenour, ha yezour, 'n eru hoari.

1912

V

Abherve

Kromm e chouk : eun tagos. Tata koz ar Varzed.
'Zo bet koz a-viskoaz ; n'eo ket c'hoaz didonet :
N'ev nepred, ar paour-kêz ! nemed lêz, lêz pe dour.
Ya, med karantez Breiz 'zo e-kreiz ar hlañvour.
En Breiz n'eus den brasoh na welloh o vale.
Diskabell ! Bretoned, saludet⁴ Abherve.

1912

³ garel : ?

⁴ saludet : saludit.

Ar grak-kazeg hag ar rozenn

(Troet euz ar galleg)

Eur gaer a grak-kazeg en em gavas berniet
E-kichenn eur rozenn vleuniet.
« O ! rozenn, a laras dezi ar gahadenn,
Em heñver, te n'ez out nemed teñvalijenn.
Blouh evel ma'z on-me, ront, 'vel eun u dinamm,
Ha lugrnuz evel eul louiz nevez-flamm,
Me 'zo faro 'vel eur markiz
Ha koantoh c'hoaz eged ne oe Narsiz,
Em hichenn-me, o ! merhig vorlivet,
Gand Jupiter, te 'zeblant droumaget. »

Ar rozennig, pleget he fenn gand izelder,
A lavare, fur ha seder :
« An oll vleuniou, en o rouantelez,
A halv ahanon-me o rouanez.
Va liou ken flour, ken glan ha ken tener,
A zo gloar al liorz hag enor ar maner. »

Ar grak, raktal, sonn he fenn, a laras :
« Ha me, va flah, a zo enor an hentchou braz.
Al lorch 'goll ahanout hag az kollo muioh.
Me a ziskenn diwar eur marh kalloh,
Rag va mamm 'oa kazeg eal⁵.
Mouz da vouez dirakon eur wech all.
Selaou ar huzul-ze, va homer, hag asant
Ez on mil gwech koantoh eged n'ez out-te koant.
Hag en tu-hont, na te 've glaharet,
Asant ez on welloh savet. »

A-boan achuet he lavar,
Eur bagad golveni⁶, kanfarded didrugar
A arruas a-denn-askell,
'Vel an avel, euz pellder an dremmwel.

Ar gistion⁷ 'oe trohet berr-ha-berr.
« Truez, eme ar grak, gortozit ken emberr. »

Gortoz ! ya da ! dioutañ ar bagad
Ne reas 'med eur genaouad.

Meur a grak-den a weler o sevel,
Hag o label⁸ an oll gand o babouz :
A-walh ez eus gand eul lapous
Evid rei deze eur gentel.

⁵ eal : leoneg, evid ar rim : êl.

⁶ golveni : golvaned.

⁷ gistion : galleg. An afer.

⁸ labeli : labeza.

Etre an daou laer

An Aotrou 'n Teo, e gov a-raog, a lar d'ar paour :
« Perag eta, paotr ker, perag c'hoantaoud aour ?
Petar 'dalvezfe dit beva 'n eur hastell kaer ?
N'eo ket mad 'n em staga ouz eur vuhez ken berr.
An hini 'glask madou ar bed a zo eun dall :
Da beorien ar bed-mañ 'vo madou ar bed all. »

Job an Treud ne lar ger ; hogen soñjal a ra :
« Komzou an Aotrou 'n Teo 'zo treud war va bara.
Daoust hag eñ e vefe kalz ponnerroh va beh
Ma vefe amann druz war va zamm bara seh ?
Mar deo red beza paour 'vid kerzed d'an neñvou,
Perag d'an Aotrou 'n Teo derhel stard e vadou ?
O wdeloud va aotrou ken stag ouz treo⁹ ar bed,
Meur a hini a lar n'ez eus bed all ebed. »

Hogen setu 'zo deut eur mab d'an Aotrou 'n Teo
Da douza Job an Treud pleget dindan ar yeo.
E gomzou, disheñvel euz re e dad, 'zo kleuz,
Med da drei c'hoaz muioh ar sperejou a-dreuz :
« N'ez eus Doue ebed, eme an Teo neve' :
Pa vez maro ar horv, 'vez maro an ene,
Hounnez eo lezenn da d'hini, mar out fur :
Er vuhez-mañ, hepken, ema ar blijadur. »

Job an Treud, o klevoud komzou ken enebet,
Eur epnnadig amzer 'zo chomet souezet :
« Ahanta, emezañ, ne vin ket mui eur zod :
Er bed-mañ me 'fell din kaoud ivez va lod...
Pa zellan tad ha mab, me a wel bremañ sklêr,
Am-eus roet va foan evid maga daou laer,
Nag herez er bed-mañ, nag herez er bed all !...
Re bell on bet sunet gand an daou lampon fall. »

Ha setu Job an Treud ne zelaou ken bremañ
'Med e vad e-unan hag e skiant-prenañ.

⁹ treo : tregerieg : traou.

Ar falz Breizad

(gand klotennou diabarz)

« Ar gwisk ne reas biskoaz
Gand eur gwaz eur manah. »
Ar brageier, braz ha *berr*,
A *weler*, respet dah¹⁰,
War reor eur bern *Gallaoued*,
N'hallfont ket dond a-benn
D'obr gante *Bretoned*
A *spered*, birviken.

O ! nag eo kaer an aotrou
'N e vragez, 'n e chupenn !
Sellit outañ o *tostaad*,
Eun tog *plad* war e benn,
Eur gouriz war e gov *braz*,
Eur pennbaz en e zorn,
Bodreou war e *votou*,
'N e *henou* eur pez korn.

« E ! deiz-mad dah, paotr va *bro*,
Ken *faro* ! War va fez !
Na c'hwi 'zo o vond, ken veul
D'eun eured war ar *mêz* ?
A be parrez an *ozah*
Hag ar *plah* koant he beg,
A vo herie *eureujet* ? »
« N'*entent ket* brezoneg. »

« N'ouzoh ket a *vrezoneg* ?
Genaoueg ! Perag oh
'N em wisket 'vel eur *Breizad* ?
Loen *gaouiad* ! E ! pemoh !
Mez warnoh, a-veh *kein*,
Gallo *brein* ! War ho kiz
Hastit mond, dre fank ha *poultr*
Gadn ar *foultr*, da Bariz ?
1912.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Gouennelour e oa Berthou.

¹⁰ dah : tregerieg : deoh.

Ar staoter

War don Ar Pillaouer ?

Selaouit, tudou dastumet
En-dro d'an hini a gan,
Pez a zo n'eus pell arruet
Gand eun ozah a Blouvouskan.

Diskan

Foei, foei, foei, foei d'ar gwin-ardant
Pa zo jistr mad en on bro.

Ne larin ket dah e ano,
Rag mez a rafen d'e dud,
Med ken aliez 'vez mezo
Ken a zeuio dah e vrud.

Mar karit 'vo anvet Jakez,
Med koulz 've eun ano all ;
Siwaz ! meur 'hini er barrez
Eveltañ 'vez mezo-dall.

N'eus ekt pell 'ta, e ti Jakez,
E oed o komeria,
Beza 'oa friko ha krampouez
Ha gwin-ardant da lonka.

Va feiz ! laret zo : kenavo.
Kaset eo an dud d'an hent,
Med Jakez 'ra buan distro,
Ha d'an ti a red kerkent.

Lamma 'ra war ar boutaillou
A zo eno 'n eur bagad :
Goug eur voutaill en e henou,
Lonka a ra tri gougad.

Med ken buan e tanfoeltras
Ar voutaill e-kreiz an ti
Hag ar paour-kêz den a grias
« Petrol 'eo 'oa enni. »

Redeg a reas da zislonka,
Redeg a reas d'an oaled.
Med raktal e kredas mouga
'Touez kurunou ha luhed.

Eul luhedenn hir a dapas
Barvenn ar paour-kêz Jakez
Bremañ eo e henou ken noaz
'Vel hini eur bennherez.

Eur e-neus bet Jakez mezviad,
Pa n'eo bet paket en berr,
Pa n'eo ket bet eet ar flammad

A-dreuz e henou d'e... rer¹¹.

¹¹ rer : reor.

Gwalenn ar goz tostenn

War eun ton joauz.

Ha c’hwil ne pe’ klevet komz euz eun itron goz,
O chom e Landreger en eun ti don ha kloz ;
Honnez a zo tostenn ‘vel n’ez eus bet biskoaz ;
Beza ez eo ken treud, ken plad hag eur holvaz.

Ne oar den pegement a vadou ‘zo ‘n he zi ;
Bepred ‘mañ en druillou ha ne gred ket debri ;
Ar hi ‘zo o wihal, staget ouz troad ar viñs :
Bez ‘n-eus eun askorn eur wech hepken beb miz.

P’arru he merourien, da hourmikêl, ‘n eru bern,
A-wechou ‘vint pedet da chom eno d’o mern :
‘N eur hoz plad fresellet¹² ‘vez torret bara kraz,
Ha tanfoeltret warnañ dour bervet war eur haz.

Mond a reas, eur merher, ha ne oe ket heb beh,
Da varhad Landreger, he haba¹³ war he breh ;
Hag en eru varhata kement yar ‘oa eno,
Glebia ‘ree ‘n he genou he biz-gwalenn bep tro.

Med ne gavas hini prest da loskel heh u.
« Me a felle din, ‘mezi, e tevje din dioustu :
Eur gwenneg a gollfen o hortoz ken warhoaz. »
« Va feiz, ‘me ar marhadour, tañvezet ‘h eus ar vlaz. »

A-boan ‘oa pellaet, setu-hi war he giz
Gand eun êr spouronet ‘n eur zelloud ouz he biz,
Hag hi da hirvoudi gand daelou ha glahar :
« Marhadour, va gwalenn ‘zo ‘n diadreñv eru yar ! »

« Med em-oa deg yar, ha pemzeg, hag ugent,
Hag o diadreñviou o-doa heveleb ment.
Siwaz ! en pehini eo sahet, den n’hen goar. »
« Marhadour, va gwalenn ‘zo ‘n diadreñv eru yar ! »

« Pater ! eme hemañ, n’ouzoh ‘med marhata,
Mar ne dehit ket buan, me ‘ya d’ho pahata.
Achu eo ar marhad, me ‘zo o vond d’ar gêr :
Na chomfet ket amañ da difoñsa va yer. »

¹² fresellet : faoutet.

¹³ he haba : galleg.

